

IMBOURC'H

30 Mae 1972

Niverenn 29

IMBOURC'H, K E L A O U E N N B O L I T I K E L

Trede bloavezh

Niverenn 29

31 Mae 1972

Darvoudoù e Breizh : stourm sevenadurel ha stourm
politikel.....p.113
Lizher kaset gant unan eus an Emsaverion lakaet en
toull-bac'h e Paris, er "Santé".....p.119
Dielloù : danevellskrid eus Devezhioù-studi ar J.E.B.
e Roazhon.....p.120
Evezhiadennoù.....p.123
Gwirvoud Afrika.....p.125
Dielloù : "Geneliezh ur c'houmanat".....p.128
Raktaolenn ar Skol-hañv etrekeltiek.....p.136
Devezhioù-studi SKOL AN EMSAV.....p.137

Ar pennadoù embannet ebarzh IMBOURC'H gant izili eus E.B.V. ne
enouestlont e nep doare an aozadur e unan.

Koumanant-bloaz : ugent lur (20 lur). K.R.P. Y. Ollivier,
1.534 25 Roazhon. Deraouifi a ra ar c'houmanat-bloaz e miz
Genver. Priz an niverenn : 2,00 lur. Ar pennadoù a zo da gas
da Y. Ollivier, 7 bd. A.-Burloud, 35 - Roazhon.

CPPP : 50 015

DARVOUDOU E BREIZH :

STOURM POLITIKEL

HA STOURM SEVENADUREL

Setu Breizh ur wech ouzhpenn war wel en holl gelaouennoù Breizh ha Bro-C'hall, er skingomz hag er skinwel. Gwir eo, abaoe deroù ar bloaz ez eus bet darvoudoù liesseurt e Breizh : barnedigezh hor c'heneiled Robert Guenard ha Gweltaz Durand, harzidigezhioù trizek keneil arall, izili eus Talbenn Dieubiñ Breizh (F.L.B.), stourm ar "Joint-Français", brezel al laezh hag an darvoudoù da heul harzidigezh stourmerion an F.L.B.. A-raok gwelout dazweredoù an darvoudoù-se e Breizh avat e ve mat o adlec'hiañ en amzer.

E miz Genver eta e voe harzet Gweltaz Durand ha Robert Guenard evit bezañ kemeret perzh e tangwalladur an ti-maltouterezh e Sant-Malo nav miz bennak a-raok. Barnet e voent ur wech kentañ e Sant-Malo, da zaouzek miz toull-bac'h, c'hwec'h anezho war goursez evit Gweltaz, ha tri miz ha pevar miz evit Robert. Un tell-kastiz a oa ouzhpenn. Galv a voe graet. An eil prosez a c'hoarvezas eta d'ar 15 a viz Mae hogen an disoc'h ne oa da vezañ roet nemet d'an 29.

Etretant e oa tarzhet ti Bouygues e Sant-Malo (Bouygues a zo un embreger bras en deus graet berzh, pinvidik mor hag a felle dezhañ prenañ kalz douaroù ha traezhennoù e-kichen Sant-Malo).

Da heul an darzhadenn-se e voe goulennataet 175 Breizhad ha dalc'het unnek anezho e toull-bac'h ar "Santé" e Paris, pemzek devezh goude Pask : Yeun Gourvez, medisin yaouank, Fañch Gourvez, studier, Pierre Coudray, kouer ; Joseph Souvestre, kouer, Pierre Ménager, kouer, Pierre Charpentier, beajour-kenwerzh ; Maurice Drouin, embreger bihan, Jean-Yves Gautier, micherour ; Jean-Yves Le Souef, liorzhour ; holl eus korn-bro Roazhon.

"Kuzulioù skoazell d'ar brizonidi bolitikel breizhat" a zo bet savet eta e Breizh ha drezo ez eo bet kaset endro un obererezh bruderezh evit lakaat anavezout gant Breizhiz paliou

ar re a oa bet harzet, evit lakaat anavezout stad Breizh : an trevadennerezh, korvoerezh ar vicherourion e Breizh ; gwaskerezh ar gouerion ; distrujidigezh ar bobl vrezhon ha diskar he sevenadur. War un dro e voe pledet gant an harp da reiñ d'ar brizonidi dre sikour o familhoù, kas tud da labourat war ar maez e tiez-feurm ar gouerion a zo en toull-bac'h, dastum arc'hant evit o skoazellañ hag o difenn.

Abaoe Pask eta ez eus bet graet bruderezh un tammig e pep lec'h e Breizh hogen ar stourm a zo bet renet dreist-holl e Roazhon. Al lun 15 a viz Mae a zo bet graet anezhañ un devezh stourm ; ur vanifestadeg a zo bet graet daoust d'ar C.R.S.ed hervez ur gadoniezh nevez diazezet gant ar stourmerion vrezhon. Diouzh an noz ez eus bet graet ur vodadeg gant 700 pe 800 den.

An ao. beleg Le Breton avat a zo bet harzet e fin ar vanifestadeg. Barnet eo bet d'ar gwener ha lezet da vont dieub. Miliadoù a draktoù a zo bet skignet c'hoazh dindan baeroniezh Sant-Erwan, patron ar Reizh d'an 19 a viz Mae.

D'an 29, disoc'h barnedigezh Gweltaz ha Robert : 50 emsaver a ya d'al lez-varn. Pa voe klevet e oa bet kresket ar c'hastiz e voe garmet e brezhoneg "Nann d'ar justis c'hall e Breizh" hag e galleg "justice bourgeoise". Unan ac'hanomp, Yann-Vari an Aridon, a voe harzet. Diwar neuze e voe ret kas ar bolised da skarzhañ ar Vrezhoned er-maez da heul ur c'hrogad taer a badas ur c'hardeur da nebeutañ. E-keit-se e oa barnet Yann-Vari da ur mizvezh hag un devezh toull-bac'h (e seurt doare ma vo merket war e "carnet judiciaire").

Kerkent e voe skignet c'hoazh miliadoù a draktoù dre Roazhon gant an talbenn "Ur Breizhad ouzhpenn en toull?"

Abaoe Pask ez eus bet eta e Roazhon ur stourm politikel dizehan war an dachenn vrezhon ; miliadoù ha miliadoù a draktoù a zo bet skignet e Roazhon, er skolioù, dirak an uzinoù, er straedoù, er gourvarc'hadoù ken e krog ar boblañs da welout ez eus un dra bennak.

E-keit-se ez eo tarzhet stourmadegoù ar "Joint-Français" ha re ar gouerion gant brezel al laezh. Muioc'h-mui e kompren Breizhiz ez int trevadennet hag ez eus da ren e Breizh ur stourm broadel evit didrevadennañ Breizh, ha ne vo un diskoulm nemet pa vo ar galloud etre

daouarn ar bobl vrezhon hec'h unan. Ken gwir eo kement-se m'o deus ar C.G.T. hag ivez ar "Gauche prolétarienne" (askell gleiz ar P.S.U.) stourmet ouzh an emskiantekaat-se. En hevelep doare e lenner war an "Humanité" "Partie de la Bretagne, la guerre du lait s'est rapidement étendue aux autres régions" pezh a zo ur gaou rikrakn'eus nemet ar "Sarthe" a zo bet tizhet en diavaez da Vreizh ha c'hoazh, gant kalz dale.

PETRA DASTUM EUS KEMENT-SE ?

Da gentañ : diwar labour an Emsaverion ha diwar zegouezh ar bobl vrezhon hec'h unan emañ an emskiant vroadel o kreskiñ muioc'h-mui. Breizhiz a oar gwelloc'h-gwellañ ivez ez int Breizhiz hag ez eus anezho ur bobl ; muioc'h-mui ez int emskiantek eus ar ret maz eo dezho stourm evit bevañ, a-enep d'an trevadennerezh ha korvoerezh ar gevalaouriezh. Ar gouerion, pergen, a wel sklaeroc'h-sklerañ e rank ar bobl hec'h unan kaout ur galloud etre he daouarn hag a dro neuze war-du ur gevredigezh sokialour : emañ pobl Vreizh o tihuniñ hag oc'h en em anavezout hec'h unan evel pobl.

D'an eil : pouez an trevadennerezh a zo kreñv tre c'hoazh e Breizh. Hor bro n'eo ket trevadennet hepken gant aozadurioù ar Stad c'hall hogen gant aozadurioù all evel ar C.G.T. pe ar P.S.U. daoust dezho da vezañ gwevn evit darn anezho. An "trevadennerezh meizel" eo an hini gwashañ marteze e Breizh evel ma skriv en e lizher unan eus ar brizonidi : Breizhiz n'int mui gouest da brederiañ na da soñjal drezo o unan nag evito o unan hogen dre ar mennozioù a zo bet roet dezho gant o zrevadennourion. Se ne dalv ket ez eo fall an holl vennozioù-se hogen ez eo ret dezho addeskiñ soñjal en o c'heñver-int, ha nann e-keñver ar skouer kinniget dezho a-ziavaez.

PETRA A C'HELL OBER AN EMSAVERION ?

Liesseurt kenañ eo labour an Emsaverion eveljust ha pep hini ne c'hell ket ober pep tra. Hol labour a rank bezañ kenaozet hervez ar stourm a zo da ren e Breizh, elese, adlakaat pobl Vreizh en he frankiz, daskorifi dezhi ar galloud war he labour, he binvioù-kenderc'hañ hag

he buhez sevenadurel. Ur seurt pal ne vo ket tizhet eus un devezh d'egile. Ret eo eta d'an Emsaverion bezañ spiswel a-walc'h evit merzout an tuezioù pouezusañ.

Al labour emskiantekaat a zo da genderc'hel bepred. Evit se re rank an Emsaver kemer perzh er stourmoù, kaout darempred gant ar Vretoned a zo emsavet, strivañ en o zouez.

Hogen gant an emskiantekaat e sav muioc'h-mui kudenn ar sevenadur a roio tro d'ar bobl vrezhon da vevañ drezi hec'h unan. Rak n'eo ket a-walc'h bezañ emskiantek evit ma vefe eus ar bobl vrezhon ur bobl wirion ha dieub ; emskiantek e c'hell bezañ Breizhiz hogen chom hep bezañ gouest evit keloù se da gemm penn d'ar vazh e Breizh ha da gemer ar galloud enni war o binvioù-labour, war o douaroù. Kenderc'hel a c'hellont daoust da se da sujañ d'ur galloud estren pe galloud un nebeut kevalaourion (Breizhiz a orin pe get, hogen er-maez eus ar bobl vrezhon n'eus forzh penaos). E-keñver meiz e vint sujet c'hoazh d'ur galloud estren, d'ur sevenadur estren. Pouezus kenañ eo eta d'an Emsaverion labourat da adc'henel evel Breizhiz ha lakaat ar bobl vrezhon a-bezh war hent an adc'hanedigezh-se o krouiñ o sevenadur-int diwar o "c'hevala istorek" (1). Un dra ret eo an "emvrezhekaat"-se evit kement Breizhad a zo hogen diforc'hioù zo da ober. Buan un tammig eo bet lavaret e oa arallekaet pobl Vreizh rak e gwirionez eo ar werin an nebeutañ levezonet gant ar galloud impalaerour ; hi an hini eo he deus miret ar muiañ perzhioù dibar ar vroad vrezhon. Ar gwaskerezh, ar moustrerezh a zo bet arveret a-enep dezhi o deus he lakaet da gaout mezh anezhi hec'h unan. Hogen ar vezh-se a zo un azon eus he breizhadelezh. Un arallekadur meizel eo da gentañ eta hini ar bobl vrezhon, un arallekadur he laka da gemer talvoudoù ar galloud sujer evit talvoudoù gwirion ha da gas he sevenadur-hi d'ar blotoù. Da skouer : ar brezhoneg a zo yezh ar paour kaezh tud hag ar galleg yezh an dud a zoare. Hogen tra ma soñj an dra-se e oar ar werin alies gwelloc'h brezhoneg eget galleg hiziv c'hoazh.

A-feur ma saver en deskadurezh hag er frammoù gall avat eo kemmet penn d'ar vazh. Evit ar werin e oa kalz pouezusoc'h an arallekadur meizel eget an arallekadur sevenadurel. Evit "tud desket", studierion pe tud e penn aozadurioù gall e Breizh (c'hweluniadoù,

strolladoù politikel) e c'hoarvez ar c'hontrol : dont a ra ar re-se da gompren gwelloc'h-gwellañ saviad Breizh, an trevadennerezh, korvoerezh al labourerion hogen nebeutoc'h-nebeutañ ez eus Breizhiz anezho e gwirionez. Stummet int gant ar skolioù gall, dre hanterouriezh an danvezioù kelennet pe ar mennozioù o redek hag a zo ar memes re eus Strasbourg da vBourdel hag eus Brest da Paris ; stummet int dre vennozioù o strollad politikel pe c'hweluniadel kreizennet e Paris. Da lavarout eo : troc'het int diouzh ar bobl a fell dezho difenn. Komprenet o deus arallekadur pobl Vreizh hogen gallekaet int ; elese, ar stourm a glaskont ren e Breizh a c'hell dont da vezañ un nevez-trevadennerezh ; da lavarout eo e tiazezint e Breizh un trevadennerezh hag a vo kaset endro gant kargidi c'hall hogen gant Breizhiz diwriziennet, disrannet diouzh ar bobl. Kement-se a zo splann ha sklaer en darn-vuiañ eus ar broioù afrikat. Kalz eus ar re-se a zo bet sujet d'an impalaeriezh c'hall. Ur galloud politikel o deus bremañ hogen pennoù ar broioù-se a zo bet stummet gant Bro-C'hall hag a gendalc'h da zistrujañ sevenadur o fobloù-int ; da skouer, Sengor, rener ar Stad senegalat, barzh ha skrivagner gall ; da skouer ivez, renerion ar Stad v Malagasiat ("Madagaskar") e-lec'h ez eo sellet yezh an enezenn evel ur yezh estren hag e-lec'h e tremener ar "vachouriezh" - un arnodenn c'hall, e galleg penn-da-benn. Setu eta an arvar : e teufe Breizhiz stummet hepken gant an impalaeriezh c'hall dindan kement stumm soutil a zo (koulz strolladoù a-du gant ar Stad c'hall hag ar strolladoù dispac'hel) da gelem Breizhiz egiz mistri hag int arallekaet o unan bepred hag o washaat dre se arallekadur ar bobl vrezhon.

Labour kentañ an Emsaverion eta a zo neuze terriñ penn-da-benn pep darempred gant ar galloud sujer. Ne c'hell ket al labour-se bezañ kaset da benn en un devezh. Rankout a reer kregiñ d'en em adsoñjal ekéñver ar bobl vrezhon ha diwar he sevenadur, he c'hudennoù perdeziek ; rankout a ra pep hini ac'hanomp "adc'henel" evel Breizhad evit bezañ gouest da zegas un dra bennak talvoudus da bobl Vreizh dieub.

Neit ha ne vimp ket gouest da vevañ evel Breizhiz, da

grouiñ ur sevenadur evel Breizhiz e vo aner hor stourm politikel.
Ne raimp nemet sevel un nevez-trevadenn c'hall.

Aze emañ an dalc'h hag aze emañ neuze unan eus stourmoù
pouezusañ an Emsav. Dre ma kresk an emskiantekaat e Breizh, dre ar
stourmoù hag ar bruderezh, war-bouez an degouezh istorel hag armerzhel,
e rankomp diorren en hor bro hor sevenadur pobl. Aze emañ diazez ; aze em
emañ diazez hor frankiz a bobl ha diazez hor frankiz politikel hag
armerzhel. Setu al labour a zo kaset endro gant SKOL AN EMSAV, da
skouer, hag a ranko bezañ diorreet muioc'h-mui. Ma fell deomp bezañ
Breizhiz e rankomp bezañ desket evel Breizhiz dre hor yezh hag hor
sevenadur. Kement-se a c'houlenn ur striv bras digant ar stourmerion
a fell dezho kas Breizhiz war hent an dispac'h.

T.L.

(1) "Kevala istorek" a implijomp evit talvezout ar sevenadur diorreet
en amzer dremenet gant pobl Vreizh evel pobl vrezhon, gant an Emsav,
hag a zo danvez ha diazez ar sevenadur a vo krouet gant ar vroad vrezhon
warc'hoazh.

=====

LIZHER KASET GANT UNAN EUS AN EMSAVERION LAKAET EN TOULL-BAC'H
E PARIS ER "SANTE"

Keneiled ker,

setu degemeret ganin ho ker ; n'emaomp ket evit klemm eus hon degouezh, daoust dezhañ bezañ fall. Hon daoulagad zo du-hont e Breizh, gant stourm ar "Joint-Français", stourm pemdeziek ar micherour breizhat evit e vara, gwasket, heskinet, izelaet, pe c'hoazh e-kichen un tiegezh kouerion vihan e Breizh evel-hini Joseph Souvestre, en deus poan da vevañ. Ha gwir eo, diaes eo en em santout en e aez pa vezer bet lakaet en ur stad reuzeudik, diskaret an ti-feurm gant an dleoù, ar c'hred, an urcherion. Penaos chom hep kompren ez eus tud o deus c'hoant paouez a blegañ atav ?

Hor soñj a zo ivez e-kichen hon tud, hor gwragez, hor bugale. Ne ouzon ket peseurt keleier a zo du-hont ; pezh a ouzon eo e ra an trevadennerezh meizel unan eus pevar zroad an drevadennouriezh, e-kichen an hini sevenadurel, armerzhel ha politikel. Chom a ra ar c'helaouennoù a zo e Breizh kelaouennoù sujañ. Kement-se zo anat bewech ma sav ur stourm er vro, e vez tennet e ster gwirion digantañ pe zoken tremenet hep komz diwar e benn. Se zo o labour pennañ.

Setu perak e stourmimp amañ war an dachenn bolitikel evit ma vo gouezet gant ar c'helaouennoù etrevroadel peseurt kudennoù a sav e Breizh. Morse c'hoazh ne voe roet deomp-ur-gador-brezeg ken uhel.

Dleout a reomp lavarout n'omp e nep doare a-enep da bobl Frañs. Diaes eo dezhi bevañ ha rannvroioù zo a zo paouraetkeit ha ma vez kaset war-raok ar palioù hag an amkanioù dibabet gant ar galloud. Dleout a reomp lavarout e santomp he stourm tost tre ouzh hon hini. Met m'eo gwasket ent armerzhel, evidomp-ni e santomp Breizh disneuziet en un doare armerzhel, sevenadurel, politikel ha kevredadel ; dleout a reomp lavarout e santomp ar bobl vrezhon evel un talvoud.

Ent istorel ez eo degouezhet an darn-vuiañ eus ar broioù e prantad an didrevadennañ. E Breizh, al lusk a zo lañset e-keñver sevenadur : unvanet oe bet ar yezh, savet ul lennegezh arnevez, krouet frammoù-kelenn hag inbourc'h. Ent marmerzhel hag ent politikel emañ pobl Vreizh o veizañ hec'h enkadenn ; setu perak e tifluk diouti nerzhoù kalet. Ar yoc'h a stourm war he zachenn, daoust d'ar vourc'hizion a zo bet e pep amzer stag ouzh ar galloud sujer. Met muioc'h-mui e teu Breizh da vezañ un talvoud eviti. En hon touez ez eus sindikadourion, kouerion, mezeion, beajourion-genwerzh, micherourion, ha tri bloaz zo e oa beleion.

Piv a gredo nac'h ez eo diazezet hor stourm war gudennoù pobl Vreizh ?

Peseurt hent a gemero an didrevadennerezh ? Prest omp da soñjal en Europa ma ro tu da Vreizh d'en em ziorren.

Ma fell deoc'h hor skoazellañ, kemerit darempred gant "Skoazell Vreizh". Anavezout a reont hon ezhommoù hag ezhommoù hon tiegezhioù.

SKOAZELL VREIZH : CPPF : 202-22 RENNES en ur resisaat
war gein ar chekenn : Kont SKOAZELL VREIZH NIV. 038985.

D I E L L O U

Embann a reomp amañ da heul troidigezh vrezhonek un danevellskrid eus Devezhioù-studi ar J.E.B. e Roazhon d'ar 25 ha 26 a viz Meurzh 1972, gant un nebeut addisplegoù da heul.

=====
Kinnig a reer emstrivañ da sevel un diskleriadenn kevredel nevez ha disteurel diskleriadenn miz Genver 1968 ma embanne ar J.E.B. enni e oa a-du gant :

- gant ar gevreadelezh ;
- gant ur vodadenn rannvroel ;
- e felle dezhi ren hec'h obererezh e stern ar Skol-veur ;
- ma rae enni un dezrannadur diwirion eus ar saviad o lavarout e oa "Breizh ur gumuniezh emskiantek mennet an izili anezhi da vevañ kevret..."

+++++

Burutelladur ar c'healiadoù arveret

1. Galloud brezhon

Ar c'healiad-mañ en deus da ster eztaoliñ un amkan politikel o lezel a-gostez dielfennadur an nerzhoù kevredadel tal-ouzh-tal.

E framm ar c'healiad-mañ ez eo empleget kerkoulz all mennoz ur Stad vrezhon hag hini ur Vodadenn vrezhon dilennet diwar un hollvouezhiadeg.

2. Broad vrezhon

Kealiad ideologel o kafunañ an dislavaroù e rez ar renkadoù : korvoer/korvod, evit diren anezho d'ar rez brezhon/gall.

Ar c'healiad-mañ arveret evit termeniñ ar gwirvoud a hiziv a zo diwir rak n'eus broad vrezhon ebet ; a-hend-all, ur wech arveret evel amkan da dizhout e sach gantañ un diskoulmadur eus an dislavaroù meneget a-us en ur par kealiadurezhel.

3. Dishualded Vreizh

N'hon eus ket d'en em savlec'hiañ e-keñver ar rumm kudennoù -mañ, evel ma ra ar P.C.B. hogen da ziorren an obererezh war wel an emskiantekaat e ser ar stourmadennoù a-enep d'ar c'horvodur war dachenn an armerzh hag hini ar sevenadur.

Padal e ranker sentiñ ouzh un amkan a-grenn : lakaat al labourerion vrezhon da bakañ krog en o binvioù-kenderc'hañ.

4. Trevadenn - impalaerelouriezh

Ar c'healiad-mañ a zo bet arveret alies evit deskrivañ saviad Breizh, koulz gant an U.D.B. ha gant ar P.C.B.

Abarzh kaout ur mennoz resis diwar-benn ar geriennoù-mañ e vefe ret studiañ adarre roll kempredel armerzh Breizh er reizhiad kevalaour, e lec'hiañ e diorreadur ar gevalaouriezh adal deroù an unwerzherezhioù. Ouzhpenn, ober un dezrann kevan a-geñver da Euzkadi, Okkitalia, Katalounia, Korsika...

Ober ivez un dezrann e-keñver ar renkadoù.

Hogen adal bremañ e c'heller notañ un devoud a zo diforc'h hag a zo pouezus evit pezh a sell ouzh enskiantekadur ar c'horvoerezh hag ar gwaskerezh : an div gumuniezh n'eus ket bet etrezo biskoazh an darempredoù a zo bet etre Iwerzhoniz ha Saozon pe etre Gallaoued hag Aljeriz...

Estreget se, e Breizh, ez eo kresket a-ziaraok ur gevalaouriezh emren diwanet eus ar c'henwerzh.

Erfin divastus eo ar c'healiad-mañ diouzh ar merkoù-barn-mañ :

- divroerezh ;
- ijinerezhioù forbann ;
- danveziou krai ezporzhiet ha pleusket en diavaez ;
- stourm a-enep d'ar yezh.

Ne gaver enno nemet un nebeut merkoù-digemmañ eus ur saviad trevadennel.

~~~~~

#### S K R I D

An tremen eus ar moz-kenderc'hañ gladdalc'hel (XII-XIIIvet kantved) d'ar moz-kenderc'hañ kevalael en Europa hag e Bro-C'hall - a zo en hor sell bremañ - a zo bet aroueziet gant :

- kresk ar veliezh roueel (Kapetiz) ;
- koazhadur beliezh an aotrouion c'hladdalc'hel ha, da heul, kreskadur ar c'hreizennerzh e Paris kêrbenn e-lec'h e vo profet d'ar Roue ur galloud doueel.

Ar broadoù kentañ a vo ganet da vare an azginivelezh (xvvet kantved) gant ar varc'hadelouriezh. Endev, nestroniadur an amgelc'hiad a vo sevenet evit mad ar galloud kreiz en devoa ezhomm a arc'hant evit kas da benn e bolitikerezh a veurde hag a alouberezh.

En trivec'hvet kantved e c'hounez ar vourc'hiziezh ar galloud politikel ; bez ez eo hêrez an unpenniezh kozh evit pezh a sell ouzh ar c'hreizennerzh hogen dougen a ra ur gealiadurezh nevez, ur reizhiad talvoudoù nevez gant mennoziou ar "rezid, kevatalded, breudeuriezh, keodedelezh." En anv an talvoudoù-se e vo renet ur politikerezh gwirion a ouennlath e-keñver an arallgenelioù : Brezhoned, Katalouniz, Okkitaniz, Euzkariz.

Ensavelaet e vo ar vroad c'hall hag en em astenn a raio e kement lec'h m'en em astenn galloud ar Stad c'hall, war ar c'hwec'h-kogn penn-da-benn.

Kemm a zeuy da gentañ en aparchantadur an hiniden kevredadel.

Diouzh ar moz-kenderc'hañ gladdalc'hel hag er c'hevredadurioù o tiboufañ war ar moz-kenderc'hañ kevalael ez aparchante an hinidenion d'an aotrou, ha diwar an aotrou, d'ar roue.

Diwar neuze e vo dieub an hinidenion ; ne vo ket ken a

a sujidi. Koll ez aparchantint d'an "Nation", d'ar Vro, da Frañs.

"Nation" a zo ur veizenn kealiadurezhel a aotre d'ar renkad trec'h mirout ar galloud ha goarn an "Unded".

"Allons enfants de la Patrie..."

Bez e vo an "Nation" ar pennpatrom skouerel :

- hevelep stuziadur ;
- hevelep yezh ;
- hevelep kenorin ;
- c'hoant da vevañ kevret.

Ren a ray ar vourc'hiziezh hep dale ur politikerezh o tennañ da nac'hañ an diforc'hioù (orin, yezh, stuzegezh h.a.) a hanvez e grez he galloud.

Bez e vo ar skol hag ar servij-soudard rediek binvioù e sell da ren ur stourm reizhiadek evit ober eus an holl Gallaoued 'leunwir'.

Er skol e vezo argaset yezh ar c'havell.

Ar istor desket a blanto e spered ar vugale un eñvor all.

Ken mat e vo kaset al labour-se da benn m'he devo ar bobl vestroniet assammet eviti reizhiad an talvoudoù estren ha ma teuy da vezañ eviti hec'h enebour pennañ o vennouten em heñvelaat a-grenn ouzh an Arall, ouzh ar Gall.

#### WAR DACHENN AN ARMERZH

E Breizh ez eus un deroù diorreadur kevalael, kenwerzhel da gentañ ; loc'het eo ar gevalaourion diouzh an diorreadur-se evit postañ o glad en douar, sellet evel un dalvoudegezh repu ha dasprenañ domanioù un noblañs kozh en argoll; a-c'houdevezh e postint en ijinerzh.

An triwec'hvet kantved a zo bet grez meur an houarnouriezh vrezhon.

En naontekvet kantved e voe digoret govelloù an Henbont. Hogen an diorreadur boulc'het ne vo ket kendalc'het goude reverzhi c'hreantel kreiz an 19vet kantved evit an abegoù-mañ :

- diouer a enberniadur kentidik pouezus a-walc'h ;
- kreskiñ a ra an armerzh kevalael war-bouez ar c'hendamouez hag ar gevezusted ; hogen d'ar mare-se dres e tarzhammennoù gremm nevez : amsavet eo ar c'hoad gant ar glaou. Er gwiaderezh ez eo erlec'hiet ar c'hotoñs ouzh al lin ; pleusket e vez ebarzh labouradegoù ha n'eo ket er vereuri. Adal neuze e teraouo an divroerezh war-du ar c'hreiz. Pleusket e vez ar gwiadoù tost d'ar mammennoù gremm eta ; an nerzh labour a yelo e-lec'h en em gav ar c'hevala.

Padal, en deiz a hiziv e Breizh, ez eus c'hoazh ur vourc'hiziezh vrezhon met n'he deus roll istorel ebet rak ne c'heller ket he diforc'hañ diouzh ar vourc'hiziezh c'hall hag etrevroadel. N'eus anezhi nerzh kevredadel emren ebet. Dre hanterouriezh ar CELIB e c'hoari roll an hini skoret e-keñver ar Stad c'hall.

C'hwec'hvet steuñv ar Stad c'hall a ziskouez a-walc'h pegen divarrek eo ar vourc'hiziezh-se. Lakaat a ra he goanag en emezeladur Breizh-Veur er c'henvarc'had. (gallus e vefe kavout eno un nevidva nevez). Un nebeut arc'hadurioù a-du gant ar yezh a ra ivez, a zo un arouez eus he breizhadelezh :

- anvioù-lec'h e brezhoneg ;
- prezegenn e brezhoneg e Kuzul Departamant Penn-ar-Bed ;
- "Emgleo Breiz" ;
- goulennadegoù a-du gant kelennadurezh ar brezhoneg ;

Setu an tuadurioù eta. Hogen gant an arc'hadurioù-se a-du gant ar yezh pe gempennadur an diriegezh er reizhiad c'hall, hep kontañ un nebeut damvennadoù rannvroelour e tiskouez ar vourc'hiziezh vrezhon pegen berr eo he galloud (n'he deus galloud armerzhel ebet hag isurzhiat eo d'ar vourc'hiziezh c'hall).

A-benn ar fin ez eo anat n'eo ket gouest da adpakañ nep emsav dispac'hel bennak a-du gant dieubidigezh Vreizh hag ar bobl vrezhon diouzh ar c'horvoerezh hag ar gwaskerezh a zo o reuziañ anezho. En eneb, ar vourc'hiziezh lec'hel a laka ar saviad-se da badout hag a zo prest da zifoarañ ar pezh a chom eus Breizh da ispisialourion an touristerezh (Aber Vrac'h, Fouenant, Park Arvorig)...

Dirak an emgav-se hag e-keñver an aozadurioù brezhon a vremañ e tleomp kaout un emzalc'h sklaer.

Adal bremañ e tleomp kuitaat geto ar Skol-Veur o kemer stok gant izili kozh ar J.E.B. hag o tiazezañ darempredoù gant ar bihanniveroù all e Bro-C'hall hag e broioù estren all evit ober eskemmoù.

Kement-se, evit darn, a zlefe reiñ tu da ziorren e-touez ar boblañs ul luskad a lakafe anezhi da emskiantekaat ha da emouezañ ouzh he c'horvodur hag he gwaskadur, ha da adpiaouañ he ferzhioù diforc'h en ur bakañ krog en he binvioù-kenderc'hañ.

N'eus ket da dermeniñ c'hoazh <sup>posourt</sup> stumm ensavel a wisko an dieubidigezh-se. A-dreuz ar stourmadennoù a gemero lec'h eo e termeno ar bobl kement-se.

Diouzh un tu all, al labour dezrannañ a zle bezañ kendalc'het.

D'ur mare zo eus ar stourm e rankor ober kinnigoù resis d'al labourerion vrezhon.

=====

## E V E Z H I A D E N N O U

Evel m'eo merket, embannet eo ar skrid-mañ evel un diell. Padal ez eus tu d'ober un nebeut evezhiadennoù.

1. E ser an trevadennadur. Gwir eo - ha se hon eus merket hon unan - ne c'heller ket peurgeñveriañ degouezh an trevadennadur e Breizh ouzh hini broioù evel Iwerzhon pe Aljeria : poblañs Vreizh n'eo ket bet diberc'hennet diouzh he danvez-h.a. Koulskoude ez eo ret notañ n'en deus kement-se netra da welout gant ar gudenn vroadel hec'h unan. Da gentañ, en Iwerzhon : diskoulmet e oa kudenn an douar p'en deus en em ledet an Emsav broadelour ha ne oa a-hend-all ere war-eeun ebet da welout etre luskad an douar hag ar gouerion hag hini an Emsav ; hemañ a zo aet war-raok dre e emlusk e unan

(diazezet e oa war ar yezh ha n'he doa pouez ebet er c'hontrol evit paotred ar stourm "keodedel" evel O Connell h.a.). Diouzh un tu all, en impalaeriezh aostriat-hungariat n'en deus an trevadennadur armerzhel-kevredadel c'hoariet roll ebet en emskiantekadur ar boblañs. An dra-se a zisoñjer peurvuiañ. Kemendall a c'heller lavarout e ser Katalounia hag Euzkadi en ur c'heñver bennak.

2. Bourc'hiziezh. Implijout a reer er skrid-mañ an dermenologiezh varksat a zo diouzh ar c'hiz mui pe vui e studioù istorel ar Skol-veur c'hall er mare-mañ. Ur seurt termen koulskoude ne ziskleir ket kalz tra e ser Breizh. N'eus ket a c'halloud armerzhel hep galloud politikel ha dic'hallus eo prouiñ ez eo bet krouet ar galloud politikel gant ar galloud armerzhel. Deroù ha berzh an impalaeriezh roman en he deroù dreist-holl n'o deus bet netra da welout gant an armerzh. Diogeliñ ar c'hontrol a zo ober metafizig. N'eo ket kennebeut ar gevalaouriezh he deus krouet ar Stadoù arnevez hogen ar Stadoù arnevez er c'hontrol o deus roet tu d'ar gevalaouriezh d'en em ledañ. Reizhiad politikel ar Stad c'hall - ma oa Breizh klenket enni - eo he deus miret ouzh ur gevalaouriezh hag ur vourc'hiziezh vrezhon wirion da greskiñ. Hiziv an deiz n'he deus ar vourc'hiziezh vrezhon roll na pouez ebet peogwir n'en em em harp war stad vrezhon ebet. Faoz eo zoken komz eus "bourc'hiziezh vrezhon" peogwir ez eo enteuzet houmañ penn-da-benn er vourc'hiziezh c'hall (heñvel eo he stuziadur ouzh hini ar Stad c'hall dre vras h.a.)

Ar pezh a zo gwerc'hek ha seulwezek eta er vourc'hiziezh ez eo hepken ar stadelezh anezhi. A-hend-all n'eo ket dav komz eus bourc'hiziezh. Ar c'herienn-se eta n'he deus nemet un dalvoudegezh trivliadel ha n'eo ket unan skiantel rak gwall ziaes ez eo termeniñ ar vourc'hiziezh e-keñver armerzh zoken.

3. Broad vrezhon. Diouzh ar c'hiz eo hiziv lavarout n'eus broad vrezhon ebet (kv. ar gelaouenn EMSAV, da skouer), ha kompren a c'heller an nac'hadur-se ma intenter dre vroad vrezhon ur bobl ken-przhiet en ur gumuniezh politikel bennak. Hogen klask diazezañ ar stourm brezhon war un daelerezh renkadel hepken n'en defe kennebeut ster ebet. Lavaret hon eus a-gent n'he deus ar vourc'hiziezh c'hall galloud ebet er-maez eus ar Stad c'hall. Hogen disoñjal a reer ivez e c'hellfed diazezañ ar sokialouriezh er Stad c'hall hep kemm an disterañ tra er Stad c'hall nag en he darempredoù en hor c'heñver : ar c'henfeurioù a nerzh hag a c'halloud armerzhel a chomfe dres pezh ez int bremañ. Ur Stad ne ra nemet unan gant ur vroad hag ur vroad a zo da gentañ ensavadurioù. Ne c'hello pobl Vreizh eta herzel ouzh ar vroad c'hall, bourc'hiz pe get, nemet dre grouiñ hec'h ensavadurioù hec'h unan, ha kement-se adal bremañ, hep gortoz taol bazh hud un dispac'h bennak.

4. Dishualded. Nac'hañ a ra ar J.E.B. en em dermeniñ dirak kudenn an dishualded da zibab pe da zisteurel adal bremañ. Krediñ avat e kavo ar bobl hec'h hent hec'h unan a zo ur fazi. Ar bobl ned ay gant hent ebet diouti hec'h unan, hep bezañ bet heñchet en a-raok gant ur framm a ouezo-eñ da belec'h e ranker mont. Hep seurt framm ne ziwano e Breizh adarre nemet ur "jacquerie" bennak a seurt gant ar "Bonedoù ruz". D'an Emsav eo eta dibab un hent hag e ziskouez d'ar bobl. Arabat deomp kouezhañ en " abafted veizel" ha tec'hout diouzh hon atebegezhioù.

=====

## G W I R V O U D   A F R I K A

Prezegenn ar Pennsturier Sekou Toure, bet distaget d'an 20 a viz Meurzh, da geñver digoradur kendalc'h an Dispac'h Gwineat, a zo pouezus, d'hor soñj, rak diskouez a ra ez eo krog pobloù Afrika da gompren e rankont adc'hounit o fersonelezhioù broadel.

Blenier Gwinea a zo savet krenn a-enep da implij ar yezhoù estren evel yezhoù kefridiel er Stadoù afrikat.

"Diwar vremañ," emezañ, "e ranko al lennegezh, ar c'helaouennoù, ar skridoù ledañ-deskamant skiantel ha kalvezoniel bezañ skridaozet er yezhoù broadel. N'eo ket sirius," a gendalc'has, "ober eus hor pobloù pobloù galleger pe saozneger pa n'eus ket zoken 30% eus ar boblañs a oar un tamm galleg pe saozneg... Bez e tleomp chom ni hon unan..." Hag eñ, da c'houde, menegiñ skouer Bro-Saoz a oa aet war-gil war dachenn ar spered goude ma oa bet lakaet ar galleg - a oa ur yezh estren evit ar Saozon - da yezh kefridiel e-pad tri-c'hant vloaz.

Gant un evezhiadenn eus ar prezeger on bet dedennet dreist-holl, pa lavar, da skouer, e vije bet trec'het ar Viet-nam pellzo ma n'en dije ket en em vataet eus ur yezh vroadel (don eo moarvat seurt evezhiadenn petra bennak ma ne glot ket, war hor meno, gant ar varksouriezh-leninouriezh reizhkredennek, evel m'eo emdroet e meur a vro).

Hogen selaouomp c'hoazh Sekou Toure : "Dre ma implijomp bepred yezhoù an drevadennerion," emezañ, "omp chomet warlerc'hiet war dachenn an armerzh, ar skiant hag ar galvezoniezh... Dreist eo an ijinour, ar mezeg, an imbourc'her a zo chomet war an dachenn en Afrika da nep piv bennak a zo bet stummet en Europa, dre maz eo chomet a-stok ouzh e bobl hag ouzh gwirvoud e vro..."

Ar brezegenn-mañ, d'hor soñj, a sach evezh an dud war unan a c'hrevusañ dañjerioù a zo o kinnig distrujañ Afrika Zu. Biskoazh n'eo en em gavet pobloù Afrika e ken bras arvar a arallekadur ha m'emaint abaoe ma tennont o mad eus eus ar vrizh-frankiz bet profet dezho gant an ez-trevadennerion.

Ur goanag hepken a zo, evel m'en deus diskouezet Sekou Toure : distreiñ da vammenn ur sevenadur afrikat gwirion, pezh a c'hou-laka adurzhiañ penn-da-benn frammadur ar c'hevandir du. R'am aotreo eta al lenner da venegiñ ar pep pennañ eus ur pennad am boa embannet ebarzh niverenn 17 ar gelaouenn LABOUR (Eost-Gwengolo 1960), a zo steuziet ha disoñjet abaoe pell, da geñver an darvoudoù a lakae strafuilh neuze er C'hongo belgiat hag a zo bet anataet siwazh gant brezel ar Biafra a-c'houdevezh :

"An darvoudoù-mañ o deus lakaet splann pegen dister diazez a zo d'an harzoù a zo bet roet d'ar Stadoù afrikat, ha pegen berrbad eo tonket dezho bezañ, pa n'eus anezho, egiz m'emaint hiziv, nemet dilerc'h diwezhañ an trevadenneriezh.

Diberzhiet eo bet Afrika an 19vet kantved gant kigerion dall, dre zegouezh, diouzh lazoù ar Stadoù europat alouber, hep derc'hel kont eus gwirvoud an dud, ar yezhoù pe ar c'henelioù, o vuturniañ

pobloù kenouenn hag o strollañ kenelioù enebet an eil ouzh egile hag hep netra boutin kentrezo.

Ne welomp ket penaos e c'hellfe ar stadoù nevez savet-mañ herzel pell amzer ouzh emled ar vroadelouriezh afrikat hag emkiantekadur bepred leunoc'h ha klokoc'h ar pobloù du. Ar republikoù kartoñs ha paper alaouret savet war dachenn an impalaeriezh c'hall a zo dija o tispenn evel re ar C'hongo. Darn anezho a zo bet rannet dija evit genel stadoù nevez evel ar Senegal hag ar Mali a glask un diazez speredel e koun un impalaeriezh vojennel, evel ar "Ghana", pezh a ziskouez a-walc'h pebezh ezhomm o deus an danvez broadoù afrikat da vagañ o lorc'h pobl, daoust ma n'eo ket a-walc'h ur seurt hengoun evit krouiñ ur wir vroad er-maez eus gwirvoudoù ar yezhoù hag ar c'henelioù ; rak ar gwashañ zo evit ar vroadelourion afrikat eo n'eus evit c'hoazh en Afrikat broad ebet.

Diouzh un tu e kaver ar meuriadoù, ar gouennoù, ar yezhoù hag ar rannyezhoù diniver kerentiet ha kenweet etrezo, hep harzoù resis etrezo, egiz kogus, dispis ha disneuz koulz lavaret; e kement-se ez eus danvez broadoù hogen an danvez broadoù-se n'o deus ket bet amzer c'hoazh da emdreiñ, d'en em seveniñ, d'en em genurzhiañ evit krouiñ yezhoù ha stadoù broadel gwirion : n'eus broad kongoat ebet, n'eus broad ebet eus Aod an Olifant, n'eus broad kreizafrikat ebet... Ha diouzh un tu all, dres, e kaver Stadoù kevanaozel ha tidel ha na zalc'hont kont ebet eus gwirvoudoù kevredigezhel ha kenel Afrika.

Soñjal a reer diouzhtu en Indez a-raok an dishualded, er bed-se kemplezh ha luziet da sabatoù, a grouer tamm ha tamm a-dreuz skoilhoù ha diaesterioù a bep seurt, en urzh-se o tiwanañ tamm ha tamm eus an dizurzh. Hogen ar Saozon o doa legadet da Indez ur framm start hag ur mererezh a ro tu d'al labour urzhiañ-se da vont war-raok. Hogen n'eus ket anv a grouiñ ur seurt stad ledet d'ar c'hevandir en e bezh en Afrika : ar mennad-se evit ar poent n'eo nemet un huñvre bolitikerion ha diouganerion. Bez e tleo ar broadoù afrikat eta emdreiñ e framm ar sternioù a zo bet ijinet gant mererezh trevadennel ar broadoù europat, re ledan pe re strizh, a c'hell c'hoari ur roll bennak moarvat evit ur pennad amzer, evit un nebeut dekvloavezhioù, evel ar yezhoù hag ar gizioù estren a zo bet degaset da Afrika. Ar yezhoù-se avat ne c'hellont, e nep doare, pourchas un digarez d'ar re a garfe rannañ douar-bras Afrika etre gallegerion, saoznegerion pe bortugalgerion. Asantiñ da gement-se a vefe arallekaat da vat ha da viken ene Afrika hag he fersonelezh ha mougañ tamm ha tamm hec'h ijin gwirion evel m'eo bet empennet gant Doue ; asantiñ da gement-se a vefe ober eus an Afrikad un harluad war e zouar e unan hag a lakafe da badout betek dibenn an amzerioù mac'homerezh trevadennel Europiz, Gallaoued, Saozon pe Bortugaliz, en un doare kuzh marteze met en un doare kalz klokoc'h ivez.

Ar C'hallaoued o deus komprenet mat an dra-se. Dindan va daoulagad emañ diskleriadenn enseller-meur an deskadurezh foran (a gaver ivez en niverenn 2 eus LABOUR :

"Ar gouarnamantoù afrikat a zo e chal gant ar pezh a zo anezhañ e gwirionez a ouezo kendrec'hiñ - spi hon eus - ar re eus o c'henvreudeur a garfe krouiñ ha lakaat da zegemer ur yezh afrikat boutin e vefe kement-se un embregadenn diaes meurbet hag a zegasfe dale da emdroadur ar vro en un doare reuziek meurbet..."



A-dreuz ar c'homzoù-mañ ez eo taget ar sevenadur afrikat en e bezh. Ar bleiz en em ziskouez enno ivez rak gouzout a ra ar gouarnamantoù afrikat e vint kastizet war dachenn an armerzh ma ne zegemeront ket dreistelezh ar galleg en o mererezhioù.

Arguiñ a raor moarvat n'eus yezh ebet en Afrika Zu a vefe gouest da gevezañ gant ar yezhoù europat a sevenadurezh ha n'eus ket tu da zispakañ ur yezh a sevenadur diouzh ar rannyezhoù diniver a zo komzet war diriegezhioù ar stadoù afrikat.

Moarvat ez eo warlerc'hiet ar yezhoù afrikat hogen n'eo ket dic'hallus arnevesaat anezho en ur ober un nebeut dekvedoù, egiz m'eur deuet a-benn d'ober en Indez-Sina end-eeun. Kement-se a ziskouez hepken he deus Afrika kement ezhomm a yezhoniourion hag a saverion stankelloù. Evit pezh a sell ouzh niver ar yezhoù afrikat hag an disheñvelderioù a zo etrezo ez eo arabat krediñ kement a gont an drevadennerion a wechall : kalz eus ar yezhoù-se n'int e gwirionez nemet rannyezhoù ha n'eus ket muioc'h a gemm etrezo eget etre hon rannyezhoù-ni e Breizh, etre tregerieg ha gwenedeg, da skouer (soñjal a ran, da skouer, er yezhoù "Wālaf" ha "Serere")

Eus pep stroll rannyezhoù ez anad dres ur yezh-stroll, danvez yezh a sevenadur ; darn anezho o deus dija ul lennegezh kozh damheñvel ouzh hini ar grennamzer europat ; kresket eo al lennegezhioù bemdez gant oberennoù nevez, troidigezhioù h.a. Kement-se a zo gwir dreist-holl en trevadennoù saoz kozh.

Bez ez eus ivez yezhoù a zaremprederezh etreafrikat, yezhoù frank evel ar swaheli, levezonet da vat gant an arabeg. Notomp a-hend-all ne implij ket ar soudarded afrikat enouestlet el lu gall ar galleg etrezo - a anavezont koulskoude - hogen kentoc'h peurvuiañ ar yezhoù etreafrikat evel ar Walaf hag ar Banbara.

A-hend-all ez eo ur fazi krediñ ez eo deuet ar yezhoù trevadennel europat da vezañ yezh ar gefredourion afrikat pe ar mererezh. E gwirionez e chom ar yezhoù europat-se estren ouzh ar boblañs peogwir n'eo ket bet skoliet houmañ betek hiziv koulz lavaret. Ret e vo gortoz da nebeutañ kant vloaz, eme ar cheik Anta Diop, evit ma vo tizhet ar maezioù gant ar skoliata. Koulz eo d'ar mare-se kelemm kentoc'h ar yezhoù afrikat broadel. N'eus forzh penaos ivez, ma c'hell ar yezhoù europat degas un dra bennak d'un nebeut Afrikiz ne servijo nemet da dougnañ spered orin ar poblañsoù afrikat dre vras.

Daoust hag Afrika a ouezo disteurel paz eo poent c'hoazh levezon ar stadoù artifikel diazezet gant an dalc'herion europat evit korvoiñ anezhi gwelloc'h ? Evidomp-ni e kredomp ne dc'heller ket adurzhiañ da vat ar c'hevandir-se hep kas da get da gentañ kement a zegas soñj eus an tremened trevadennel. Moarvat e rank Afrikiz - peogwir n'o deus ket gwell - ober e-pad ur pennad gant ar Stadoù a zo bet savet abaoe pemzek vloaz bennak. Hogen arabat e vefe dezho en em vozañ da vat ouzh ar Stadoù hag ouzh ur saviad a zo e gwirionez frouezh an dalc'hidigezh trevadennel. Rak sklaer eo ivez e ranko Afrikiz ober o seizh gwellañ evit diazezañ ur gwir sevenadur broadel ma ne fell ket dezho bezañ nemet marmouzerion Europiz ha netra ken.

DIELLOU " GENELIEZH UR C'HOMUNOUR "

( Genesis of a Communist )

Testenn dennet eus Steredenn ruz a-us da Sina

( Red Star Over China ) gant Edgar Snow  
(1938)

\*

Troet gant Yann Morvan.

Ganet eo Edgar Snow e Kansas City (Stadoù-Unanet) e 1906. Adalek 1928 e stagas da veajiñ dre ar bed ha dont a reas da vezañ kelaouenner e Changai. Flour e teuas ar sinaeg gantañ a-benn un nebeut bloavezhioù. Trizek vloaz e chomas er Reter Pellañ o veajiñ kalz dre Sina hag o tont da vezañ mignon gant kalz kefredourion sinat.

E 1936, d'ar mare m'edo an alouberion japanat o c'hounit tachenenn tamm ha tamm war c'houarnamant broadelour Nanking, en e benn Tchiang-Kai-Chek hag ar C'houomintang, ne veze graet nemet "torfedourion ruz" eus ar gomunourion repuget er c'hornog goude an Ergerzhadeg Veur, ha ne oa aet kelaouenner ebet d'o gwelout neuze. Digredus e c'heller kavout hiziv ne anaveze netra koulz lavaret ar bed diwar-benn Mao-Tse-Toung hag an emsav renet gantañ.

E mezheven 1936, e skoas Edgar Snow war-du ar Gwalarn, da lavarout eo war-du an tachennoù melestret gant ar re ruz ha kaelet gant ar vroadelourion. Dont a reas a-benn da dreuziñ al linennoù, da dizhout Pao-An, ar gêrbenn gomunour, ha da gejañ gant Mao... Distroet eo meur a wech da Sina abaoe 35 vloaz ha sellet e vez outañ hiziv evel ouzh unan eus ar siriusañ arbennigourion diwar-benn Sina. Mignon bras eo chomet gant Mao, na oa e 1936 nemet rener ur strollad heskinet ha repuget e tachennoù kollet ha digenvez, deuet abaoe da vezañ sturier brasañ riez komunour ar bed, ennañ palevarzh an denelezh.

D'ar mare m'emañ o kreskiñ mui-ouzh-mui levezon Sina e politikerezh ar bed, hon eus kavet e vije dudius evit lennerion Imbourc'h lenn an danevell-se ha n'eo ket anavezet kalz, istor ur paotrig a netra ganet war ar maez ha deuet da vezañ unan eus brudetañ disparhourion an holl vareoù. N'eo ket un istor ijinet gant ur c'helaouenner evel ma c'hoarvez re alies met buhezskrid Mao gantañ e-unan. E-pad devezhioù ha nozvezhioù hir e chomas Edgar Snow o selaou Mao o komz diwar-benn e vro, e stourm, ar Strollad Komunour Sinat ha diwar e benn dezhañ e-unan. Ergorel ne c'hell ket bezañ ur seurt danevell evel-just met talvoudus-kemañ eo evit kompren Sina a vremañ. Setu eta pezh a lavare Mao e Pao-An e 1936:

" Ne zo ganet e kêriadenn Shao-Shan e Hsiang T'an Hsien, e ranndir Hunan e 1893. Anv va zad a oa Mao Jen-Shông ha anv va mamm Wen Ch'i-Mei. "

" Ur c'houer paouer e oa va zad ha rediet e voe da vont da soudard, pa oa yaouank c'hoazh, dre ma oa sammet gant dleoù ponner. Soudard e voe e-pad meur a vloaz. Diwezhatoc'h e tistroas d'ar gêriadenn lec'h ma voen ganet hag e teuas a-benn da adprenañ e zouar dre arboellañ gant evezh ha dre zastum un nebeut arc'hant, dre generzhañ un tammig ha gant embregerezhioù all."

"Evel ar gouerion geitat e piaoue neuze va ziegezh pemzek "mou" douar. Warno e c'helled eostiñ seikont "tan" riz bep bloaz. ( E.S. : un "tan" a dalveze war-dro 60 kilo). En holl e veze bevezet gant pemp ezel va ziegezh tregont-pemp tan, da lavarout eo war-dro seizh bep hini, pezh a leze ur reñverad eus ugent-pemp tan. En ur ober gant ar reñverad-se e tolpas va zad ur c'hevala bihan hag e prenas seizh mou ouzhpenn goude, pezh a roas d'am ziegezh live kouerion "binvidik". An tu hor boa neuze da eostiñ eikont-pevar tan riz bep vloaz".

"Pa oan dek vloaz ha pa biaoue va ziegezh pemzek mou hepken, e c'hoarveze va ziegezh eus va zad, va mamm, va zad-kozh, va breur-yaouañ ha me. Goude m'hor boa prenet seizh mou ouzhpenn e varvas va zad-kozh met dont a reas ur breur yaouañ all. Un dreistad pergontnav tan riz hor boa avat d'ar mare-se hag edo va zad en e vleud".

"D'ar mare ma oa va zad ur c'houer keitat e stagas d'ober war-dro dezougen ha gwerzhañ greun hag e c'hounezas un nebeut arc'hant en doare-se. Goude bezañ deuet da vezañ ur c'houer "pinvidik", en em ouestlas d'ar c'henwerzh-se e-pad darn vrasañ an amzer. Goprañ a reas ul labourer-douar a-hed an deiz hag e lakaas e vugale da labourat en atant koulz hag e wreg. Stagañ a ris da labourat an douar pa voen 6 vloaz. N'en doa va zad stal ebet evit e genwerzh. Ne rae nemet prenañ greun digant ar gouerion baour hag hen dezougen neuze da genwerzhourion kêr, e-lec'h ma c'houneze ur priz uheloc'h. E-pad ar goañv, pa veze malet ar riz, e c'hopre ul labourer ouzhpenn evit labourat an atant, en doare ma oa neuze seizh genou da vagañ. Difard e tebre va ziegezh met a-walc'h e oa bepred".

"Stagañ a ris da studiañ er skol gentañ pa voen eizh hag e vanis eno betek ma voen trizek vloaz. Abred diouzh ar beure ha diwezhat en abardaez e labouren en atant. E-kerzh an deiz c'lenner Teskadoù Konfusius hag ar Pevar C'hlaseler. Va c'helenner sinaeg a oa gantañ doareoù strizh-tre er skol. Garv ha rust e oa hag alies e skoe war ar skolidi. En abeg da se e tec'his eus ar skol pa oan dek vloaz. Ne greden ket distreiñ d'ar gêr gant aon rak degemer ur roustad hag e skois war-du ar gêr vras a oa en ul lec'h bennak en un draonienn, a gave din. E-pad tri devezh e kantreis a-raok bezañ kavet gant va ziegezh a-benn ar fin. Neuze e teskis em boa redet-diredet en-dro d'ar gêr en ur gantreal ha ne oan ket aet pelloc'h eget 8 li eus va zi, en holl".

Goude va distro d'ar gêr ez eas avat va stad war wellaat, pezh ne oan ket evit gortoz. Un tammig habaskoc'h e voe va zad ha techet e voe ar c'helenner da vezañ reishoc'h. Ul levezon bras en devoe warnon disoc'h va oberenn-enebiñ. Un "harz-labour" kaset da vat e voe".

"Fellout a reas d'am zad va lakaat da zerc'hel levrioù-jediñ an tiegezh kerkent hag em boe desket un nebeut lizherennoù. Fellout a rae dezhañ e teskfenn an doare d'ober gant an abakenn. Dre ma poueze va zad war gement-se e krogis da labourat war ar jedadurioù-se diouzh an noz. Ur mestr labour rust e oa. Ne blije ket dezhañ va gwelout dilabour ha pa ne oa levr ebet da zerc'hel, em lakae da labourat en atant. Un den brouezek e oa hãgcalies e skoe warnon ha war va breudeur. Ne roe deomp arc'hant ebet, ar boued treutañ ne lavaran ket. D'ar 15 eus pep miz e rae ul largentez d'e labourerion

ha gant o riz e roe dezho vior, ne oa anv ebet a gig avat. Din-me ne roe na vior na kig".

"Ur vaouez tener, brokus ha plijus e oa va mamm ha prest e oa bepred da rannañ pezh a oa ganti. Truez he doa ouzh ar re baour hag alies e roe riz dezho pa zeuent da c'houenn kement-se diganti e-pad an naonegezhioù. Met ne c'helle ket hen ober p'edo eno va zad. Abeg a gave en aluzennoù-se. Kalz tabutoù hor boe er gêr diwar-benn ar gudenn-se".

"Div gostezenn a oa en tiegezh. Diouzh un tu e oa va zad, ar Galloud o Ren. Diouzh an tu all e oa an enebadur, ennañ me, va mamm, va breur ha zoken al labourer a-wechoù. Mennoziou disheñvel a oa avat e "Talbenn Unvan" an enebadur. A-du e oa va mamm evit ur politikerezh arsailhiñ hanterat. Abegiñ a rae kement anatadur dilouenedigezh ha kement emsavadenn digor a-enep d'ar Galloud o Ren. Lavarout a rae ne oa ket an doare sinat".

"Hogen, pa voen trizek vloaz e tizolois ur arguzenn c'halloudus en ur vreutaat gant va zad war e dachenn dezhañ, dre venegiñ ar Glaselerion. Tamallet e veze din alies gant va zad enzalc'h amvabel ha va leziregezh. En eskemm e tegasin arroudennoù eus ar Glaseleriono tisplegañ e ranke bezañ hegarat ha karantezus an dud war an oad. A-enep d'ar rebech bezañ lezirek e ris gant an arguzenn e ranke labourat muioc'h an dud war an oad eget ar re yaouank, ha dre ma oa teir gwech kosoc'h egedon e ranke va zad labourat muioc'h eta. Ha me da lavarout e vefen kalz oberiantoc'h egetañ p'em befe e oad".

Kenderc'hel a reas ar paotr kozh da 'zastun pinvidigezh', pe ar pezh a veze sellet evel madoù bras er gêriadennig-se. Ne bre-nas ket douar ken e-unan met prenañ a reas kalz gouestloù war c'hladoù tud all. Pignat a reas e gevala eus 2 000 dollars da 3000 dollars

" Kreskiñ a reas va dilouenedigezh. War ziorren ez eas ar stourm daelerezhel en hon tiegezh (E.S. : Dre vousfent e rae Mao gant ar gerioù politikel-se ha c'hoarzhin a rae en ur adsoñjal d'an darvoudoù-se). Soñj nat am eus dreist-holl eus un darvoudenn. Pa oan trizek vloaz war-dro e pedas va zad kalz kouvidi er gêr hag e-pad m'edont eno e tarzhas un tabut etrezomp-ni hon daou. Va diskuliañ a reas va zad dirak an holl dud bodet eno, en ur ober ac'hanon ur paotr lezirek ha didalvoud. Kement-se am lakaas da fuloriñ. Kunujeniñ a ris anezhañ hag e kuitais ar gêr. Redek a reas va mamm war va lerc'h ha klask a reas va c'hendrec'hiñ da zistreiñ. Va zad ivez am heulias, o jarneal e-pad ma c'hourc'hemenne din dont en-dro. Tizhout a ris ribl ur poull hag e kinigis en em deurel ennañ ma tostae c'hoazh. D'ar poent-se e krogas ur varc'hatadenn evit paouez gant ar brezel diabarzh. Derc'hel a rae va zad evit ma rafen va didamalloù ha k'ou-t'ou evel un arouez a sentusted. Asantout a ris reiñ k'ou-t'ou gant ur glin ma promete chom hep skeiñ warnon. Evel-se ez echuas ar brezel ha deskiñ a ris eus kement-se e plege va zad p'edon o tifenn va gwirioù en un emsavadenn digor, er c'hontrol ne rae nemet jarneal ha skeiñ muioc'h warnon pa chomen hesent hag izelek.

" En ur brederiañ war gement-se e kav din e voe faezhet va zad en dibenn gant e strizhder. Dont a ris da vagañ kasoni outañ ha sevel a rejomp un Talbenn Unvan gwirion a-enep dezhañ. Va mad a dennis ivez eus kement-se moarvat. Va lakaat a reas da vezañ strivantoc'h em labour ; va lakaat a reas da zerc'hel va levrioù en un doare aketus, en doare ma ne vije gantañ digarez ebet evit va zamall."

" Daou vloaz skol en doa bet va zad ha gouest e oa da lenn a-walc'h evit derc'hel levrioù. Dizesk a-grenn e oa va mamm. Eus tiegezhioù kouerion e oant o daou. Al "lenneg" nemetañ e oan en tiegezh. Anavezout a raen ar Glaselerion met ne blijent ket din. Pezh a blijer din a oa romantoù Sina Gozh, ha dreist-holl danevelloù an emsavadegoù. Lenn a ris Yo Fei Chouan (Chin Choung Chouan), Shoui Hou Chouan, Fan T'ang, San Kouo ha Hsi You Chi, pa oan c'hoazh yaouank-flamm, daoust ha evezhiañs va c'helenner kozh a vage kasoni ouzh al levrioù berzet-se hag a rae anezho levrioù noazhus. Peurliesañ e lennis anezho er skol ouzh o goleiñ gant ur c'hlaseler pa dremene ar c'helenner em c'hichen. Evel-se e veze graet gant darn eus ar skolidi. Deskiñ a raemp meur a istor hogos dre eñvor hag e vreutaemp a-gevret c'hoazh alies diwar o fenn. Anavezout a raemp un niver brasoc'h anezho eget kozhidi ar gêriadenn a gare ivez anezho, ha boaziet e oant da eskemm istorioù ganeomp. Me gav din e voen moarvat levezonet kalz gant seurt levrioù d'un oad trivlidik."

" Kuitaat a ris en dibenn ar skol gantañ pa oan trizek vloaz ha stagañ a ris da labourat en atant e-pad eurvezhioù hir, o skoazellañ al labourer gopret gant va zad, o kas da benn labour gwirion ur gwaz e-pad an deiz hag o terc'hel levrioù evit va zad diouzh an noz. Daoust da se teuis a-benn da genderc'hel gant va lennadurioù, o lonkañ kement skrid a c'hellen kavout nemet ar Glaselerion. Chalet e veze va zad gant se rak fellout a rae dezhañ va gwelout o vestroniañ ar Glaselerion dreist-holl goude m'en devoe kollet ur prozez en abeg d'un arrouden glasel implijet e kentel gant e eneber dirak ul lezvarn sinat. Ar boaz am boa da c'holeiñ prenestr va c'hambri diwezhat en noz evit mirout ouzh va zad gwelout ar sklerijenn. En doare-se e lennis ul levr a blijas din kalz, a oa e ditl Gerioù Digemenn (Shen Shih Wei-yen). Kavout a rae d'an aozerion, int un dornad lenneion gempennour kozh, e teue gwander Sina eus e-ziouer a araezioù kornogel - houarnhentoù, pellgomz, pellskriv ha bigi dre dan - ha fellout a rae dezho o degas er vro. Sellout a rae va zad ouzh seurt levrioù evel amzer gollet. Fellout a rae dezhañ va gwelout o lenn traoù pleustrek evel ar Glaselerion, a c'hallfe e skoazellañ evit gounit prozezioù."

" Kenderc'hel a ris da lenn romantoù ha danevelloù kozh al lennegezh sinat. Un deizh e verzis e oa un dra iskis en holl zanevelloù-se : ne oa anv ebet a labourerion-douar enno. An holl dudenoù a oa kadourion, kargidi pe lenneion ; ne oa morse un haroz kouer. E-pad daou vloaz e souezhis gant se ha neuze e tezanis danvez an danevelloù. Dizoleiñ a ris e veze kanmeulet ganto holl, tud a vrezel, renerion ar bobl, tud n'o doa ket da labourat an douar dre ma veze perc'hennet ha kontrolet ganto ha dre ma lakaent evel-just kouerion d'e labourat evito."

" Hollarvarour e oa va zad, Mao Jen-Shêng, abaoe e yaou-ankiz met va mamm a azeule Bouddha gant devosion. Ur gelennadurezh kravezel a roas d'he bugale ha doaniet e oamp holl gant diskredoni hon tad. Pa oan nav bloaz e tivizis a-zevri gant va mamm diwar-benn ar gudenn eus difeizded va zad. Meur a daol -arnod a rejomp a-vare da vare evit klask e gounit d'ar feiz hogen en aner. Ne rae nemet jarneal diwar hor penn ha beuzet dindan e arsailhoù e kiljomp evit sevel steuñvioù nevez. Met ne felle ket dezhañ klevout anv eus an doueoù."

" Kregiñ a reas avat va lennadurioù d'am levezonañ hag hollarvarour e teuis da vezañ, pezh a roas glac'har d'am mamm a stagas d'am zamall evit va diseblanted e-keñver endalc'hoù ar feiz hogen va zad a chomas hep ober van. Un deiz avat ma'z ae gant e hent evit mont da zastum arc'hant e kejas gant un tigr. Souezhet e voe an tigr gant ar gejadenn-se ha tec'hout a reas raktal met souezhetoc'h c'hoazh e voe va zad ha prederiañ a reas kalz diwar-benn e silvidigezh burzhodus. Kregiñ a reas d'en em c'houlenn hag eñ n'en doa ket feuket an doueoù. Muioc'h a zoujañs a ziskouezas d'ar voudadegezh adalek neuze hag ezañs a laoskas ur wech an amzer. Daoust da se, pa'z eas war greskiñ va dianzavadur, ne emellas ket ennañ ar paotr kozh. Ne bede an doueoù nemet p'endeveze diaesterioù."

" Gerioù Digemenn" a atizas annon ar c'hoant da adkregiñ gant va studioù. Heuget e teuis ivez da vezañ ouzh va labour en atant. A-enep e savas va zad evel-just. Rendaeliñ a rejomp diwar-benn se hag en diwezh e tec'his pell eus ar gêr. Mont a ris da di ur studier war ar gwir a oa dilabour hag eno e studis e-pad un hanter vloavezh. Goude se e studis muioc'h ar Glaselerion gant ul lenneg sinat kozh hag e lennis ivez ur bern pennadoù kempred hag un nebeut levrioù. "

" Er mare-se e c'hoarvezas un darvoud en Hunan a levezonas va buhez a bezh. Er-maez eus ar skol sinat bihan m'edon o studioañ enni, e verzjomp ni studierion, ur bern marc'hadourion fav o tistreiñ eus Changsha. Goulenn a rejomp diganto perak edont holl o vont kuit. Displegañ a rejont e oa c'hoarvezet un emsavadeg ras e kêr."

" Bez e oa bet un naonegezh charv er bloaz-se e Changsha e oa limiadoù a du a rae diouer dezho ar boued. An dud-se o vervel gant an naon, a gasas dileuridi d'ar gouarnour evit goulenn skoazell met rok e respontas dezho hemañ. 'Perak n'hoc'h eus ket a voued ? Bez ez eus e-leizh e kêr. Me am eus bet a-walc'h bepred.' Pa anavezas an dud respont ar gouarnour e teuas an holl da vezañ kounnaret-tre. Dalc'het e voe bodadegoù bras aozet un dibunadeg. Taget e voe ar warded mandchouat, torret gwern ar banniel, arouez kefridigel, ha kaset er-maez ar gouarnour. Da heul kement-se e teuas war e varc'h ar C'homiser evit an Aferioù Diabarzh, un den a oa Chang e anv, ha lavarout a reas d'an dud e kemerfe ar gouarnamant divizadurioù evit o skoazellañ. A dra sur e oa gwirion Chang en e ouestloù hogen d'an impalaer ne blije ket ha tamallet e voe dezhañ kaout liammoù start gant al "livastred". Di zornet e voe. Erruout a reas ur gouarnour nevez ha raktal e kemennas pakañ renerion an emsavadeg. Dibennet e voe kalz anezho ha diskouezet o

fennoù war beulioù evel ur gentel evit an'disujidi' da zont."

" E-pad meur a zevezh e chomjomp en skol o vreutaat diwar-benn an darvoud-se. Mont a reas don em^spered. A-du gant an "emsaverion" e oa darn eus ar studierion all met diouzh savboent un evezhier hepken. Ne oant ket evit meizañ an darempred en doa kement-se gant o buhezioù dezho. Ne oant dedennet gant se nemet evel un darvoud broudus. Morse ne zisoñjis kement-se. Meizañ a ris e oa tud boutin gant an emsaverion evel va ziegezh din-me ha santout a ris don-pegen direizh e oa bet an doare d'ober ganto."

" Nebeut amzer warlerc'h e savas un diemglev e Shao-Shan etre izili Kê Lao Houi, ur gevredigezh kuzh, hag ur gourferc'henn. O degas a reas dirak al lezvarn ha dre ma oa ur gourferc'henn galoudus ne voe ket diaes evitañ prenañ ar varnedigezh a-du gantañ. Faezhet e voe izili eus Kê Lao Houi. Met e lec'h plegañ en em savjont adarre ar re-se a-enep d'ar perc'henn ha d'ar gouarnamant hag e kiljont d'ur menez nes, Liou Shan e anv, lec'h ma savjont ur c'hreñlec'h. Kaset e voe soudarded a-enep dezho ha brudañ a reas ar perc'henn o doa aberzhet ur bugel o'n em zispac'hañ. Anvet e oa rener an disujidi " P'ang an aozer mein-vilin". En diwezh e voent barnet ha dibennet. Un haroz e oa avat evit ar studierion rak a-du gant an emsavadeg e oant holl."

" Ar bloaz war-lerc'h, pa ne oa ket eostet c'hoazh ar riz nevez ha pa oa diviet riz ar goañv e savas ur verrentez a voued en hor pastell-vro. Skoazell a c'houlennas ar re baour digant ar gouerion binvidik hag int da gregiñ gant un emsav, e anv " Debriñ Riz Hep Paeañ ". Ur marc'hadour riz e oa va zad ha kas a rae kalz greun eus hor pastell-vro d'ar gêr vras, daoust d'ar verrentez. Kemeret e voe unan eus e gasadennoù gant ar bloueziz paour ha spouronus e voe e gounnar. N'em boe kendruez ebet evitañ. En hevelep mare e kavas din e oa fall ivez hentenn ar gouerion. "

" Levezonet e voen ivez d'ar mare-se gant ur c'helenner "radikal" a gelenne en ur skol gentañ lec'hel. "Radikal" e oa dre ma enebe ouzh ar voundadegezh ha dre ma felle dezhañ kas an doueoù da get. Erbediñ a rae ouzh an dud ober skolioù eus an temploù. Rendaelet e veze kalz diwar-benn e bersonelezh. Bamet e chomen outañ hag a-du e vezen gant e vennozioù."

" Enlouc'hañ a reas don va spered yaouank, dija disuj, an holl zarvoudoù-se lerc'h-ouzh-lerc'h. D'ar mare-se ivez e krogis da ziorren un doare emskiant politikel, dreist-holl goude bezañ lennet ur flemmskrid diwar-benn diempradur Sina. Sofij am eus bremañ zoken eus frazenn gentañ ar flemmskrid : "Siwazh, kabestret e vo Sina ! ". Displegañ a rae alouberezh Korea ha Formosa gant Japon, ar bennaotrouniezh kollet en Indosina, Burma ha broioù all. Goude bezañ hel lennet, ez eas bihan va c'halon a-zivout dazont va bro hag e stagis da soñjal e oa dlead bep hini stourm evit he saveteiñ."

" Divizet en devoa va zad va lakaat evel deskard en ur genwerzh riz en doa darempredoù ganti e Hsiang T'an. Ne oan ket a-enep en deroù, dre soñjal e c'helle bezañ dudius. Met d'ar mare-se e klevis komz eus ur skol nevez a-ziforc'h ha va menoz a ris mont enni, daoust da enebadur va zad. E Hsiang-Hsiang edo ar skol-se,

lec'h ma veve tiegezh va mamm. Enni e oa skoliad ur c'henderv din a gomzas din eus ar skol nevez-se hag eus doareoù an "deskadurezh arnevez". Ne veze ket pouezet kement war ar Glaselerion met kelen- net e veze " gouiziegezh nevez " ar c'hornog. "Radikal-tre e oa ivez an hentennoù-kelenn."

" Mont a ris d'ar skol gant va c'henderv ha ma d'en em skrivañ. Lavarout a ris e oan eus Hsiang-Hsiang rak komprenet em boa ne oa digor ar skol nemet d'an dmd genidik eus Hsiang-Hsiang. Diwezhatoc'h ec'h anzavis e oan genidik eus Hsiang T'an an pa zizolois e oa digor an ti-se d'an holl. Paeañ a ris 1 400 gwenne- eno evit ar boued, an annez hag an holl zafar evit studiañ, kement- se evit pemp mizvezh. Asantout a reas erfin va zad va lezel da vont enni goude m'o devoe displeget dezhañ mignoned e lakfe an deskadu- rezh "araokaet"-se da greskiñ va barregezh gounit arc'hant. Ar wech kentañ e oa din bezañ ken pell ha pemont li dbuzh ar gêr. C'hwezek vloaz e oan. "

" Er skol nevez e c'hallis studiañ skiant an natur ha dan- veziou-studi nevez degaset eus ar c'hornog. Un dra heverk all a oa unan eus ar gelennerion, bet studier e Japan. Dougen a rae ur ble- zhenn faos. Goap e veze graet outañ gant pep hini ha lesanvet e oa an "Diaoul Estren Faos".

" Kement-se a vugale a-gevret n'am boa morse gwelet a- raok. Darn anezho a oa mibion gourferc'henned ha dilhadoù koustus a zougent ; dister e oa an niver a gouerion a c'halle kas o bugale d'ur seurt skol. Paouroc'h e oan gwisket eget ar re all. Ganin ne oa nemet un dilhad dereat. Ne veze ket douget saeoù gant ar studie- rion, met hepken gant ar gelennerion ha ne veze douget dilhadoù estren gant hini ebet anezho nemet gant an "diaouled estren". Fae a rae kalz studierion binvidik warnon dre ma vezen peurliesañ o tougen va forpant ha va bragoù pilhennek. Mignoned am boa avat en o zouez ha daou dreist-holl a oa va c'hamaladed mat. Unan anezho a zo b'emañ ur skrivagner ha bevañ a ra en Unaniezh Soviedel."

" Ne vezon ket karet ivez dre ma ne oan ket genidik eus Hsiang-Hsiang. Pouezus-tre e oa bezañ genidik eus Hsiang Hsiang ha pouezus ivez bezañ genidik eus ur bastellig-vro eus Hsiang Hsiang. Bez e oa ur bastell-vro uhelañ, unan etre hag unan izelañ, ha stourm a raent kenetrezo dibaouez, war un diazez rannvroel hepken. Hini ebet ne c'helle gouzañv egile. Ur savboent neptuek a gemeris er brezel-se dre ma ne oan ket genidik eus ar c'hornbro-se. Da heul e voe graet fae warnon gant an teir c'hostezenn. Bihan ez eas va c'halon d'ar mare-se. "

" Araokadennoù mat a ris er skol-se. Va c'harout a rae ar gelennerion dre st-holl ar re a gelenne din ar Glaselerion, dre ma skriven berrdanevelloù madik a-walc'h en doare klasel. Gant ar Glaselerion avat n'edo, ket va spered. Edon o lenn daou levr a oa bet kase din gant va c'henderv, a-zivout an emsav kempennour renet gant K'ang You Wei. Unan oa e ditl Deizlevr ar Bobl Nevez (Hsin Min Choung Pao) hag embannet e oa gant Liang Ch'i Ch'ao. Lenn hag adlenn a ris anezho betek o anavezout dre eñvor. Azeuliñ a raen K'ang You Wei ha Liang Ch'i Ch'ao hag anaoudek-tre e oan ouzha va c'henderv a sellen outañ evel un araokadour, daoust ma teuas di-



wezhatoc'h da vezañ un enepdispac'hour, ezel eus ar Gevredigezh Uhel, a yeas a-du gant ar gilstourmerion da vare an Dispac'h Bras e 1925- 1927."

" Da galz studierion ne blije ket an "Diaoul Estren Faos" en abeg d'e blezhenn galvezadel hogen plijout a rae din-me e gle-vout o komz diwar-benn Japan. Kelenner e oa war ar sonerezh hag ar saozneg. Japanat e oa unan eus e ganaouennoù, hec'h anv "Emgann ar Mor Melen". Soñj am eus c'hoazh eus un nebeut komzoù boemus anezhi:

" Geizañ a ra ar golvan,

Dañsal an eostig,

Hag hoalus eo ar parkeier gwer en nevez-amzer.

Bleunioù ruz-mouk he deus ar c'hraunadezenn,

Delioù gwer an haleg,

Ha bez ez eus ur skeudenn nevez."

" Kened Japan a anavezis hag a santis d'ar mare-se, ha darn eus e lorc'h hag eus e c'halloud a santis ivez er ganaouenn-se diwar-benn e drec'h war Rusia (+). Ne ouien ket e oa ivez ur Japan garv, ar Japan a anavezomp hiziv."

" Setu kement tra am eus desket digant an " Diaoul Estren Faos"."

" Soñj am eus ivez bezañ klevet d'ar mare-se hepken e oa marv an Impalaer ha Tzou Hsi, an Impalaerez-vamm, daoust m'edo dija an Impalaer nevez Hsouan T'oung (bremañ P'ou Yi) o ren abaoe daou vloaz. Ne oan ket c'hoazh enep-unpennour ; e gwirionez e sellen ouzh an Impalaer evel ouzh kalz amaezhidi evel tud onest, mat ha speredek. Ezhomm, o doa hepken bezañ skoazellet gant kempennoù K'ang You Wei. Boemet e oan gant an danevelloù diwar-benn renerion Sina Gozh : Yao, Shoun, Ch'in Shih Houang Ti ha Han Wou Ti, ha kalz levrioù a lennis diwar o fenn Deskiñ a ris neuze ivez un tamm istor ha douaroniezh estren. Klevout a ris komz evit ar wech kentañ eus Amerika en ur pennad diwar-benn an Dispac'h Amerikat a oa ennañ ur frazenn hañvel ouzh se : " Goude eizh vloaz a vrezel diaes e c'hounezas an trec'h Washington hag adsevel a reas e vro. " En ul levr a oa e ditl Haro-zed Meur ar Bed, e lennis ivez traoù diwar-benn Napoleon, Katell Rusia, Per Veur, Wellington, Gladstone, Rousseau, Montesquieu ha Lincoln."

-----

( + ) Meneg a ra ar varzhoneg eus gouelioù an nevez-amzer ha leve-  
nez diharz ar Japaniz goude Feur-emglev Portsmouth ha dibenn ar  
brezel rusian-japanat.

RAKTAOLENN AR SKOL-HANV ETREKELTIEK

da vezañ dalc'het e Dulemm adal ar 14 betek ar 25 a viz Eost 1972

Bep mintin nemet d'ar yaou 24 e voe eus 9 eur da 10,30 skol iwerzhoneg.  
10,30 - 11,00 ehan. 11,00 - 12,30 film en iwerzhoneg.  
12,30 - 14,00 Merenn.

Lun 14/8 betek 20 eur : endervezh dieub. Istor Iwerzhon I : kendael.

Meurzh 15/8 : troiad da welout lec'hioù istorel Dulemm (I); prezegenn diwar-benn al lennegezh iwerzhonek (I) ; kendael.

Merc'her 16/8. 14 eur betek 20 eur. Prezegenn diwar-benn istor Iwerzhon(II) ; kendael. Sonerezh iwerzhonat.

Yaou 17. Adal 14 eur betek 20 eur : troiad e lec'hioù istorel Dulemm (II). Kendael. Hengoun ha sevenadur pobl Iwerzhon (I) : kendael.

Gwener 18 : 14 eur - 20 eur. Istor Iwerzhon III. Kendael.

Ar c'hoariva iwerzhonek.

Lun 21/8. Endervezh dieub betek 20 eur. Da 20 eur : prezegenn : brorenerezh ha luskadoù politikel en Iwerzhon a vremañ.

Meurzh 22. Endervezh : troiad e stankenn ar vBoinn ha krugell Newgrange. Prezegenn : lennegezh (II). Kendael.

Merc'her 23. 14 eur. Prezegenn diwar-benn sonerezh ; an hengoun hag an diorreadur anezhañ. 20 eur. Brorenerezh ha luskadoù politikel en Iwerzhon a vremañ.

Yaou 24. Troiad e-pad an deiz da c'h-Glean dà Loch ha menezioù "Wicklow".

Gwener 25. 14 eur betek 20 eur. Hengoun ha sevenadur pobl Iwerzhon (II). Kendael. Fest dibenn-skol.

EVEZHADENNOU

Filmoù eus ar rummad a vez graet gant GAEL LINN ha re all ivez a vo diskouezet. Displegañ a raint arvezioù disheñvel eus buhez Iwerzhon, hec'h istor hag he sevenadur. Ar pep brasañ anezho ne badont nemet un hater eur. Ur gentel verr war an iwerzhoneg a vo da heul.

Merzet e vo e vank ar Sadorn hag ar Sul 19 hag 20 er roll. Karout a rafemp aozañ un droiad da g-Conamara (Gouzelva) en dibenn-sizhun-se ha gweladenniñ arvor ar c'hornog. Se a goustfe avat war-dro 6 Lur en tu-hont d'ar mizoù all. N'omp ket sur e vo an darn vrasañ eus ar re a fell dezho dont d'ar skol-hañv gouest da zispign kement-se ouzhpenn. O vezañ ma rankimp feurmiñ ur c'harr boutin ur pennad diagent e rankomp goulem ouzh ar re a zo mennet da zont d'ar skol diskleriañ deomp o soñj a-zivout ar mennad-se dizale goude gwelout ar raktaolenn a-us.

Ne gousto an troiadoù e Dulemm netra koulz lavaret met an troiadoù da c'hGleann Da Loch a gousto moarvat ul Lur hanter pep hini anezho. Ma ned afemp ket da Gonamara e vefe lakaet an div droiad-se en dibenn-sizhun 19-20/8 ha kendaeloù pe brezegenoù en o lec'h d'ar mareoù merket bremañ evito er raktaolenn.

Hebleg a-walc'h eo ar raktres evit gallout ober kemmoù en eurioù met ne vo ket kemmet meur a dra en endalc'had. Degas a reomp da soñj e c'hellfe al lojeiz ha lein koustañ war-dro 10 Lur ar sizhun hag evit + e vefe 2 Lur

da baeañ ouzhpenn da vihanañ. Ur skodenn war-dro 2 Lur a vo kemeret digant pep perzhiad, da vezañ paeet en a-raok. Merkañ ez eo kemmet hor chomlec'h. Skrivit deomp an abretañ ar gwellañ mard eo ho mennad dont.

Caitlin Maude, kenurzhierz ar Skol,  
Cathal O Luain, Sekretour  
Sekretour Skourr Iwerzhon ar C'hevrenn keltiek,  
51 Pairc Lanaduin, Ath Cliath 4, EIRE

---

#### DEVEZHIOU STUDI SKOL AN EMSAV

Dalc'het e vo Devezhioù-studi SKOL AN EMSAV e Lezvenn etre ar 1añ hag an 12 a viz Eost 1972.

Pedet eo an danvez studierion da reiñ o anv an abretañ ar gwellañ da SKOL AN EMSAV, 30 leurgêr al Lisoù, 35 Roazhon.

Moarvat e vo aozet ivez un nebeut devezhioù-studi a-berzh SKOL AN EMSAV e deroù miz Gwengolo evit ar re a vije bet dalc'het e-pad miz Eost. Skrivañ d'an hevelep chomlec'h evit kaout diskleriadurioù.

---

#### I S T O R   A N   E M S A V

Istor an Emsav a zo o paouez dont er-maez. Ar gevrenn gentañ anezhañ o tezrevell ganedigezh ha kresk an Emsav en naontekvet kantved ha dreist-holl e deroù an ugentvet kantved, betek dibenn ar brezel bed kentañ a zo enni 320 pajennad a vo moulet e stumm teirlevrenn, evel stagadennoù da niverennoù 29, 30 ha 31 Imbourc'h. Bez e c'heller pourchas an teirlevrenn-mañ evit 35 lur (37lur gant ar mizoù-kas). Bez ec'heller prenañ al levrennoù a-ziforc'h dre ma teuint er-maez (11 lur, 13 ha 13 lur).

Emañ istor an eil emsav war ar stern hogen ne zeu er-maez nemet a-benn bloaz.

E fin ar bloaz e teuy ul labour all er-maez : istor hol lennegezh (o plediñ dreist-holl gant marevezh GWALARN).

Evit urzhiadañ pe kaout diskleriadurioù skrivañ da Y. Ollivier, K.R. 1 534 25 Roazhon.